

*An Dizesper*

Ouspen, meo, divalve  
Eo, sur ive bambocher  
An arc'chant a c'houn  
Entro pad ar zizun,  
Ve lonket en eun de  
Ag he vreg chom'da yun.

*Ar gweel Vue*

Pa neur gav c'hoas er gaer,  
E comans d'ober bue  
Tolet ha distolet,  
Aries bazateet,  
Cetu ta ar vue  
Zo entre daou bried.

{bis}

He mam, pa deus gwelet  
Ar vue voa entreze  
A zo bet dezolet,  
O velet he dao gret  
Malheur he merc'h caret,  
Tre vije var ar bed.

{bis}

Lezit ho pugale  
Ho eun d'ober ho choas,  
Pa eo int rank usa,  
Eo just d'he choas ive,  
Ma ne larit netra,  
Vefet divlam goude.

{bis}

*Avis*

C'hui tadou ha mamou,  
Ne ret ket evel homan  
Ne deut ket da bressi  
Dimei ho pugale  
Gant aoun evelthi,  
O pefe keuz goude.

{bis}



# A R P I L L A O U E R

## Ton anavezet

---

Va zad en deus va dimezet  
Da ur flerius pillauer (bis)  
E Loqueffret e zeo ganet  
E comann Toulalaer !  
Fœi, Fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant he stoub hag he billou.

Tri deves goude va euret  
Enn ur gav foar Landerne (bis)  
Ha va lapous prim difunet,  
Ha zay er mes deus he vele  
Fœi, Fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub hag he billou.

Drailla ra eun anter Pater,  
Tana ra he gorn butun (bis)  
Tapout he ra he grog pœzer,  
Evit mont var hent Sizun.  
Fœi, Fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant he stoub ag e billou.

Gant-han n'ur gav camaradet  
Eun ur vont da billaoua (bis)  
Ho holl arc'chant eun deus fœtet,  
Ha tam pillou n'en d'he oa.  
Fœi, fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Pa oa eun anter nos sonet  
ENN Ilis vrás ar Fouille (bis)  
Me oa un intavnes glac'haret  
Va unan bars emm guele,  
Fœi, fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Mont hera d'ar velin paper  
Gant ur zac'hadic pillou (bis)  
Kals bahanc'l eget ur ler,  
Rak preset eo an dellou.  
Fœi, fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Ne pas sistro d'ar gommamannt,  
Ractal ho zav un tam cros (bis)  
E pelec'h he man da arc'chant  
Me gred he mehinn e dagov.  
Fœi, fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Pa za Yanic d'ar pardoniou,  
Bepred a ve meso dall (bis)  
Prest e oa da goll e vagou.  
E Loqueffret e deis all.  
Fœi, facei, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Pa zeuio ar c'his er vro-ma  
Da derri ann dimesiou (bis)  
Me a iello enn ur gana,  
Pell deus potret ar pillou.  
Fœi, facei, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Pa zeui karigel ann ankou,  
D'ober e dro er vro-man (bis)  
Me ha guerso var e roudjou  
Hag er pedo d'er zamman.  
Fœi, Fœi, var va zamic aotrou (bis)  
Gant e stoub ag e billou.

Ha pann d'ho ann ankou boutet  
Toul ar flerius pillauer bis  
Me a guerso d'en lavaret  
Da gomanann Toulalaer,  
Maro eo va zamic aotrou bis  
Var e stoub ag e billou.

Pa vo gret ann interamant,  
Gant ar paourkes pillauer bis  
He vo cavet ialc'h arc'chant,  
He zac'h pillou, he grog poeser.  
Maro eo va zamic aotrou bis  
Var e stoub ag e billou.

Red-vo-coms d'ann Aotrou Person  
Deus ar paourkes pillauer bis  
Ma vo canet ar Liberon,  
Hag ouspen-ze lip e rer !  
Maro eo va zamic aotrou bis  
Var e stoub ag e billou !

## FIN

*Propriété de l'Editeur.*